

Kantik Sant - Marc

Patron Parrez Trégunc

*Air : Cantique français de St-Corentin :
O Saint Pasteur, etc..*

Diskan,

O Sant Patron, Sant Mark beniget,
Selaouit mouez o pretoned :
Diskouezit d'omp hent ar vuir vuë,
D'an env, dougit ho pugale

I

Salud ! Sant Mark, patron karet hor parrez,
Guelit aman eur bobl tud daoulinet
Deut da gana gant feiz ha gant karantez :
Sellit ouzomp euz tron hoc'h eurusted.

II

Meuleudi d'eoc'h, avieler beniget,
Pluenn leal Sant Per ar Pab kenta !
Kristenien Rom, dirak ho komzou skrivet
A lavaras mil bennoz d'eoc'h gant joa

III

Parrez Tregunk, da zevez kaër ho pardon
A zav he mouez vel kristenien guechall,
Da gana d'eoc'h mil bennoz a greiz kalon
Da heul Jezuz ni ' dalo ar re all.

IV

Echu ho leor, an aviel presiuz,
'Barz an Egypt, Eskop Alexandri
Hoc'h oll aked e oue gounit da Jezuz
Ar bayaned ken stank en Eskopti.

V

Holl var evez, pa zellomp euz ho pluenn,
Ho pedi reomp gant feiz ha gant fianz
Da skriva doun en hor c'haloun, en hor penn
Komzou Jezuz, komzou an esperanz.

VI

Ha pa velomp al leon en ho kichenn :
Var ho roudou grit d'omp breman bale,
Soun ha dispount, e kreiz an emgann ken tenn
'Vit mont ganoc'h da varadoz Doue.

VII

Eun deiz, Neron, o kondaonaz d'ar maro,
Ha c'hui, laouen, skoret gant hor Zalver
A c'houzanvaz ar poaniou kriz ha garo
A roe d'oc'h kurunen ar merzer.

VIII

Breman, Sant Mark, c'houi'zo dirak tron Jezuz :
 Sellit ouzomp e traonien an daelou :
 Mouez ho tud paour a zav hirio, truezuz
 Klevit anei ! klevit hor pedennou !

IX

Parrez Tregunk a c'houlen digant Doue
 Eol tomm ha glao, gliz hag avel klouar.
 Pedit Jezuz, hor Mestr karet, hor Roue
 Da skuill e c'hraz ha madou an douar.

X

Guelit, Sant Mark, ar c'houezen o tivera
 Divar hon tal puill-puill var an ero...
 Gant ho sikour, ra vo frouezuz peb tra
 Hag er c'hrignol ar greun a lugeruo.

XI

Guelit an tad : pegement e poán bemdez
 Da gaout bara d'e vreg, d'e vugale...
 Guelit ar vamm pa n'em gav eudienez
 Ha lavarit : « Truez. o va Doue ! »

XII

Ar pesketour, pa jom goullo e roued
 A zant daelou o tont'n'e zaoulagad
 Truez outan ! rak e boan a zo kalet...
 E gennerzit epad e galonad.

XIII

Klevit, Sant Mark, peden kalz a dud iaouank
 A dro ouzoc'h da zevez ho pardon
 Goulen a reont e kreiz eur bed leun a fank
 Dalc'hen ato desklabez ho c'halon.

XIV

Beillit, Sant Marc, var hon oll bugaligou :
 En o spered, taolit had guirione...
 An den a glask, ouспен danvez ha madou
 Komzou Doue da vaga e ene.

XV

Truez, Sant Marc, ouz ar pec'her kaledet,
 Rak e spered a jom heb sklerijen
 Hag e galon zo dizec'het ha sklaset :
 Sur eo, heb d'oc'h, d'en em goll da viken.

XVI

Merzer santel, deskit d'omp karet Jezuz,
 Rak ni fell d'omp mont ganoc'h d'ar repoz
 Ia, ni fell d'omp da viken beza euruz
 En ho kichen, e gloar ar baradoz.

Imprimatur :

Kemper an 11 a vis Guengolo 1929

P. MESSEGER

Vikel vras.